

FICHENN-Bost – Kenurzhier-ez melestradurel

Kefridi hollek

Kefridi ar genurzhier pe ar c'henurzhier melestradurel eo mont-en-dro ar gevredigezh Brudañ ha Skignañ, aesaat al liammoù etre ar c'hopriddi ha gopradezed, ar radioioù ezel ha kuzul-merañ ar gevredigezh war dachennoù resis. Labourat a ra war-eeun gant ar c'huzul-merañ ha gant skipailh ar gazetennerien ha kazetennerezed.

24 eurvezh eo an amzer labour sizhuniek. Al lec'h labour zo unan eus radioioù ar rouedad.

Brezhoneg komzet ha skrivet : live B2 da nebeutañ

Kevrad termenet 1 bloavezh (kevrad micherelaat)

Ar post zo da vezañ pourvezet d'ar 4 a viz Gwengolo 2023.

Emglev ar skingas radio

Tachennoù obererezh – melestradur hollek ar gevredigezh

Merañ ar c'hoskor :

- Sevel ar c'hevradoù labour
- Heuliañ ar goproù : mererezh pemdeziek, bezañ e darempred gant IGAM
- Lakaat lezennadur an eurvezhioù labour e pleustr, merañ an ezvezañs (ehan labour, vakañsoù ...)
- Merañ ar frejoù-hent ha taolenn vakañsoù ar c'hopriddi
- Medisinerzh al labour : skodenn vloaziek, merañ an emgavioù

Merañ stummadurioù ar c'hopriddi :

- Heuliañ steuñv diorren ar barrezhioù kinniget asambles gant skipailh ar gazetennerien hag hini ar c'huzul-merañ war tachenn an arc'hant hag hini ar melestradur.
- Bezañ e darempred gant an OPCO hag ar frammoù stummañ (goulennoù bezañ kemeret e karg, kevradoù micherelaat, goulennoù restoliñ gant an AFDAS)

Kontouriezh :

- Reiñ an dorn evit merañ ar gevredigezh war an arc'hant hag ar velestradurezh
- Merañ kontoù pemdeziek ar gevredigezh
- Paemantoù, prenadenoù, fakturennoù enkefiañ chekennoù, paeañ ar goproù hag ar frejoù-hent, ober war-dro ar pezhioù ti-bank
- Labourad e darempred gant IGAM

Klask arc'hant evit ar gevredigezh :

- Sevel teuliadoù goulenn yalc'hadoù hag ar Cerfa-où en linenn
- Heuliañ ar yalc'hadoù hag o treuskas war ar gont
- Klask doareoù nevez da arc'hantaouiñ ar gevredigezh

Bezañ e an var gevredigezh :

- Kemer perzh, asambles gant un ezel eus ar c'huzul-merañ, en emvodoù aozet gant ar gevellerien

Buheziñ rouedad ar radioioù :

- Bezañ war evezh war ar pezh a sell ouzh ar radio FM, DAB+, podkastoù ha titouriñ ar radioioù ezel

Dalc'hoù

Merañ mont-en-dro hollek ar gevredigezh

Kemer perzh e obererezhioù liesseurt (ouzhpenn ar re meneget amañ) diwar goulenn ar c'huzul-merañ

Bezañ gouest da ginnig hentoù nevez diwar-benn an arc'hantaouiñ hag an diorren raktresoù

Sikour da ziorren Brudañ ha Skignañ

- Aozañ an devezh etreradioioù bloaziek
- Degas skozell da skipailh ar gazetennerien e-pad an darvoudoù divoas.

A-bep seurt :

- Merañ posteloù ha lizheroù Brudañ ha Skignañ
- Sevel an dibab pennadoù (kavout pennadoù a-bep seurt hag o lakaat en dielloù)
- Kemer perzh en emvodoù kuzul-merañ
- Bezañ al liamm etre tud ar c'huzul-merañ hag ar skipailh kazetennerien
- Bezañ e darempred gant kenurherien-rezed ar radioioù ezel

Barregezhioù pennañ

Gouizigezhioù	Gouzout ober	Gouzout bezañ
Mont-en-dro ar gevredigezh An tiriad hag ar gevellerien Ar rouedadoù titouriñ Gwir al labour Ar gxir da vezañ stummet Gouzout doareoù diaz ar gontouriezh hag an arc'hant	Arguzenniñ ha difenn ur raktres Kemer perzh e darvoudoù e anv ar gevredigezh Treuskas ar c'heloù ret da lakaat ar skipailh da vont en-dro en un doare reizh Komz, kompren, skrivañ ha lenn e brezhoneg Koaut ur sell hollek war ar gevredigezh Labourat gant hag er skipailh Sevel respontoù d'ar galvoù raktres Doujañ d'an deiziadoù Labourat war ar prim p'avez traoù mallus d'ober Merañ goulennoù dic'hortoz	Labourat gant hag er skipailh Kaout un doare kenlabour Bezañ en e aes gant an darempredoù denel Gouzout kenhentiñ Bezañ barrek war an aozadur Gouzout dielfennañ ha sintetizañ Gouzout rakwelet an traoù ha 'n em aozañ outo Bezañ krouer Bezañ dieub Kaout pasianted Bezañ liesvarrek Bezañ strategel Bezañ gouest da gemer intrudu Ober kinnigoù Selaou Gouzout emazasaat Gouzout gwelet a-bell ha en em aozañ Gouzout kilsellet Bezañ strizh war ar reolennoù Bezañ strizh war an dleadouriezh